


De. Verriar. i approbato per M. l'Evêque  
I  
L. J. M.



CANTIC SPIRITUEL

var an Histor eus ar Brinces Ju-  
dith, pehini a zibennas Holofernes,  
Roue an Egypt, dirac ar Guear a  
Vetuly; var Ton Guers Santes Ge-  
novesa.

94  
**P**ell so ab'am boa bet esper  
Da impligea lot a n amiser  
Da ober ur Chantic breton  
Agreabl da bobl ar chanton.

Rac-le em-eus songet erfin  
E vise util d'am deslin  
Trei a challec e brezonec  
Un Histor gaër an-eus cafer.

Speret divin hac adorabl,  
Bezic em andret favorabl;  
Guerc'hes Santel, va ficouret  
D'a zisclerya dar Vretonet.

Clevet hoc'heus coms alies  
Eus ar Roue Holofernes:  
Un den cruel oa meurber;  
Gant ur Plac'h oue dibennet.

Songéal a eureu dre e buiffañç  
 Ober d'ar pobl en assurance  
 E adori evit Roue,  
 Ha memes evit o Doue.

Mæs ar bopl eus a Israël,  
 O veza da Zoue fidel,  
 Ne falle quet dezo sugi,  
 Ma clascas dont d'o distrugi.

Prepari a eureu un Arme,  
 Ma oa General varnese,  
 En esper dont d'o massacri  
 Dirac ar Guear a Vetuly.

Ar bopl-màn fidel d'o Doue,  
 A breparas ive un Arme,  
 Evit songéal en em zifen  
 Rac aon eus o Vourreyen.

Ur Brinces hanvet Judith,  
 O veza er Guear a Vetuly,  
 A lequeas choas da Gommendant  
 Alchior, dre ma zoa den vaillant.

Lequeat oue da Coronat,  
 Var Arme Israël oa General;  
 Petra bennac n'oa quet Christen,  
 En devoa joa ous o Lesen.

Me ho les da gonsideri  
 Ar valiç hac ar jaloufi  
 En devoa Holofernes ar Roue,  
 Pa vel preparet e Arme.

Dont a eureu e-unan da c'houlfen  
 A c'hoant o doa d'en em zifen ;  
 Petra oa o Lefen hac o Doue,  
 Pa n'oboissent d'ar Roue.

Alchior dezàn a respontas :  
 Ar bopl-màn o deus ur feiz vras ,  
 An Doue a adoront so puissant ,  
 Pehini eo ar Roue ar Firmamant :

E buiffañ a so quer bras ,  
 Ma ficour ar bopl dre e c'hraç ;  
 Hep dale e tuint d'ho ranversi ,  
 Mar duit da glasc dont d'o forci.

*Holofernes.*

Te a goms evel un insolant ,  
 Me rai dre ur gombat sanglant  
 Devi ar Guear a Veruly  
 Ha quenent den a so enni.

Abars pemp devez hac hirio ,  
 Mar bez beo , te a velo  
 Oun brassoc'h evit o Doue ;  
 M'ho lazo tout abars neuve.

*Alchior.*

Allas ! pobl paour , mervel so ret ,  
 Holofernes a so facher ,  
 En em liquit en Orason  
 Da bidi Doue a vir galon

D'ho ficour d'allout resista  
 En ur gombat evel houmâ ,

A ij

Bras ha bian e renquer mervel,  
 Nicun n'en devezo quarter.

*Judith.*

Ma Doue, leun a vadelez,  
 C'hui è hon Roue puissant ivez;  
 Ho pezet sourci ac'hanomp,  
 Ha quemerit truez ouzomp.

Na souffrit quer, ô va Doue,  
 E ve ur maleürus a zeue  
 A ben da derri ho Lesen  
 Ha da distruja ar C'hristenien.

Grit ma vezzint oll punisset  
 Evel an Egyptianer,  
 Dre ho justiq hac ho rigueur;  
 Ha distroit ho pobl dioc'h maleur.

Ha possibl ve, ô va Doue!  
 E ve ur miserabl a zeue  
 Da brofani hoc'h Ilisou,  
 Eleac'h ma reomp hor pedennou.

Roit dezo ur bunion,  
 Pa zint quer cruel ha dirason:  
 Grit ma tigo an douar cren  
 D'o lonca e punç an Ifern.

Quer superb eo ar C'holonel,  
 Ma è leun a c'hoad criminel,  
 Hac e sonch hep hoc'h asistanç  
 D'hon laza nep repetanç.

En e nerz ema e esperanç,

Mæs c'hui, Doue, dre ho puiffanç  
 Hac ho craç a ell hon fouten  
 Ma vezimp fidel d'ho Lefen.

O fortial eus e tepas,  
 Ma permetit, ma Doue, dre ho craç,  
 Pà zui ar guin d'e anteti,  
 Ec'hallen dont d'e zistrugi.

Grit ma tuin dre ur coutelacen,  
 Daoust peguer templ ê va dourn,  
 Da droucha e ben dioc'h ar Monstr-se  
 A fell deza beza Doue.

Va Doue, roit din ar c'honsein-se  
 Ha lequit em guenou ive  
 Comsou quen douç ha quer charmant  
 M'en decevin en un instant.

Pep offanç d'am virginite,  
 Permetit ma rin ma antre,  
 Ma c'hellin, pa vezo cousquet,  
 Trocha pen ar Monstr milliguet.

Evit ma viot anavezet  
 Evit un Doue partout dre ar bed,  
 Roue puiffant ha general,  
 Crouer an Eê hac an Douar.

Va Flac'h, ro din va boquedou,  
 Va farsum, va fandoreillou,  
 Va habit caër leun a berles,  
 Ma zin da saludi Holofernes.

Laquit prest en ur valizen,

Peadra da veva ur fizun  
 Ebars er C'han gant an Arme,  
 Me roi ar falud d'ar Roue.

Lequeomp e Doue hon oll fiziars,  
 M'hor c'hunduo dre e Brovidanç;  
 Ne refus e c'hraç da bini,  
 Pa zeuer gant feiz d'e adori.

Me ho ped, oobl a Israël,  
 Mar douc'h en ho Lesen fidel,  
 Da c'houlen ficour digantàn  
 Da resista er gombat-màn.

En em liquit en Oræson,  
 Pedit Doue a vir galon,  
 Evit ma vezzimp victorius  
 Var Arme ar Roue Holofernes.

Eliachim, Roue santel,  
 Oll Beleyen Israël,  
 Gant couraich en em gonfolit,  
 Hac evidomp ni oll pedit.

Ur veac'h terrubl a antreprenàn,  
 Evit an oll e partiàn;  
 Deoc'h tud e lavaràn adieu,  
 En em liquit tout dirac Doue.

*Ar Veleyen.*

Mont a reomp gant ur vouez huel  
 Da bidi au Tad Eternel  
 D'ho conservi diouz drouc bepret  
 Er veac'h hoc'heus antreprenet.

Ho pet fonch ac'hanomp bepret,  
 Rac tost ê an Ennemiët;  
 Judith, ho pet cals a fourci,  
 'Allas! prest oar da gombati.

*Santinel an Ennemiët.*

Peleac'h ez it, Princes yaouanc,  
 Ho quenet a so ravissant;  
 Peadra en em exposi  
 Da gaout quement-all a fourci?

Chom a ellach e patientet,  
 Espern ho poaniou hac ho yec'het;  
 Evelse en em brecipitit,  
 Livirit din petra glisquit.

*Judith.*

En em recur am-eus songet,  
 Quen terrubl ez on gourdroufët,  
 Mar clasc ar bopl hoc'h insulti,  
 Me fell din en em savetei.

Me a garre, hep drouc ebet,  
 Caout an enor, mar permetet,  
 Da barlant oc'h ho Coronal,  
 Holofernes, Roue General.

*Ar Soudardet.*

Ny a yelo d'ho cundui,  
 Princes, oll gant hor mousquedi,  
 Hac ho rento, hep drouc ebet,  
 Bete ar C'horonal assuret.

*Judith.*

Roue puissant, Holofernes,  
 Rampar an oll binvidiguez,  
 Me a garre em be, emezi,  
 Ur guenou aour evit ho meuli.

Eus ho Majeste an eclair  
 A ra din mont quen agreabl,  
 Monet a ràn var va daoulin  
 Dirac ho Majeste divin

*Holofernes.*

Princes, deut, deut d'en em assuri;  
 Me ho ped, na grenit mui,  
 Ho quenet e deus ma charmet  
 En instant ma em-eus ho quelet.

Va daoulagad ha va c'h lon  
 So en em ravisset quen doun;  
 Sivit prontamant en ho fa,  
 Me eo, emeza, a dle foubla.

Judith, contit din ar sujet  
 P'evit tra oc'h amâ deuet:  
 Ha mar deus poan var ho speret,  
 Certen e vihot dilivret.

Va c'halon so e captivite,  
 Chui a ell e zenna achane:  
 Netra tout deoc'h ne refusin,  
 Mar accordit ar c'hraç-se din.

*Judith.*

D'ar famin ez int reduiset,



9  
Eva a reont goad an anevalet,  
Va ficour allen deoc'h da brestia  
Evit donet da refista.

*Holofernes.*

Princes, chetu-me tout charmer  
Dre'n eloquanç eus ho quelet,  
N'em-eus fonch nemet ac'hanoc'h,  
Va oll fizianç a so ennoc'h.

A bep hent hoc'heus desarmer  
Holofernes, Roue an Egyptet;  
Me ro deoc'h graçou souveren,  
Commandit c'hui hivisiquen.

*Judith.*

Ma roit dia graç dre ho madelez,  
E chomin gant va Servi hervez  
Da veva hervez va Lesen,  
Yac'hoc'h cals en em gomporten

Mont a rin partout da vale  
Dre ar vro ha dre ar c'hontre;  
Mar em lesit em liberte,  
Me a bedo bepret Doue

*Holofernes*

Princes, n'hoc'heus nemet pourmen,  
En em gunduit hervez ho Lesen;  
It da vale dre va Arme,  
Me ho recommando deze.

Nep a raï drouc'h dec'h, m'o funisso,  
Rac fouden ez aint d'ar maro,

Nep a guemero effronteri  
E nep façon d'hoc'h insulti.

Deut da velet va zenforiou,  
Va aour ha va finançou:  
Dec'hu int, mar quirit ivez,  
Ma ne fenchit a volontez.

Me a ya da dressa ur requet,  
Ma valeot elec'h ma querer,  
Mont a ràn d'ho recommandi,  
Ma tui va Fobl d'hoc'h enori.

Vagao, prepar prest ur banquet,  
Evit ma tufo d'am guelet  
Ar pennou bras eus va Arme,  
C'hoant bras am-eus da goms oute.

Me a esper dre da guaquet  
Judith a die beza charmet;  
Quea buan da lavaret dezi  
Doni henos da goania d'am zi.

*Vagao.*

Princes, c'hui hoc'heus gounezet  
Graç-vat ar Roue assuret;  
Bete vremâ hoc'heus guelet  
An amitie en deus bepret.

Deoc'h netra ne all da refus,  
Var e zaves oc'h ar Vestres;  
Digâcet oun d'ho suplia  
Da zont henos dy da goania.

*Judith.*

Autrou, me oar em c'hemerit  
 Dreist va enor ha va merit,  
 M'ont a ràn gueneoc'h assambles  
 Da veza d'ho Mæstr servicheres.

Un enor bras memes ê din  
 Servicha ur Mæstr so quen din,  
 Ur Roue quen douç ha quer charmant,  
 Quer puissant ha quer vaillant.

*Judith da Holofernes.*

Prinç, va Mæstr, ne veritàn quet  
 Beza ouc'h taol recevet;  
 Mæs sclear e velàn ê ho calon.  
 Carguet evidon a affection.

Hep compliment ec'hazezàn,  
 En ho quichen sur e dostàn,  
 Evit contanti ho speret,  
 Ha renta d'an oll joausdet.

*Holofernes.*

Pligeadur bras a quemeràn  
 Oc'h ho quelet em c'hichen bremàn;  
 A graçou bras em obliget,  
 Va c'halon so rejouisset.

Dibrit, est herve ho cout,  
 Me servich deoc'h a bep tra tout;  
 Rac me hac ar gompagnunes  
 A so charmet gueneoc'h, Princes.

Arabat eo eber compliment,

En ur Fest so quen excellent ;  
 Yac'h , dispos , dibrit hac esit ,  
 Evit er fin e songit.

*Judith.*

Va Frinç , va Autrou , accordit din  
 Ar c'hraç na tavin quet ho cuin  
 En ur Fest so quer charmant ,  
 Quer caër ha quer rejouissant.

*Holofernes*

Me a ya da effa d'ho yec'het  
 Assambles gant va mignonet ,  
 Gant joa bras ha rejouissant  
 Ravisset omp en assurance.

*Judith.*

Vagao , an anser so deuet  
 Poent eo caç ho Mæstr da goufquet ,  
 Goloit-èn gant e linceliou ,  
 Hac hon list amâ hon daou.

Roit din brema ar c'hraç , va Doue ,  
 Ha nerz d'am breac'h ive ,  
 Ma c'hellin gant ur c'houtellancen  
 Dont da droc'ha d'ar Monstr e ben.

Evelse o pidi Doue ,  
 Judith o tostet oc'h e vele ,  
 Gant un raol e deveus dibennet  
 Ar Monstr evel ur milliguet.

Servicheres , tosta ama ,  
 Ne eus affer mui da grena ,

Dal ar Pen-mâ evit cuzet,  
 Lesomp ar Prinç-mâ da goufquet.

Doùe ra vezo trugarequeet,  
 Ar veach-mâ ez omp dilivret,  
 Partia e'lomp hep spont ebet,  
 Ar passach so deomp permeter.

Va breudeur, deomp-ni digoret,  
 Doue en deus hon dilivret,  
 Admiromp era e vertus  
 En deus desquet din an andret.

Doùe en deus permeter  
 Dre zorn ur Plach dister treurbet  
 Donet da zibenna ur Geant  
 A sonje beza oll-buissant.

Doùe dre e zaouarn puissant  
 En deus great din beza content;  
 Holofernes so bet lazet,  
 Chetu amâ e Ben da velet.

Evit test e c'halvân an Eê,  
 Penaus oun sortiet pur ac'hane;  
 Va Eal-mat en deus va mi et  
 Quer pur evel ma oun antreet.

Gant soing en deus va c'hunduet,  
 Injur ebet n'am-eus souffret;  
 Rentomp dezàn hon enoriou,  
 Gloar ha pep feurt meuleudiou.

*Judith.*

Alchior, ha te a ene

Pen Holofernes ar Roue?  
 Chetu-èn aze o riouada,  
 Hac e Gorf commancer da vreina.

Alc'hior, en em c'hra Christen,  
 Hac en em foumet d'hon Lesen,  
 Na ve c'hoarvout a raë ganes  
 Evel gant ar Roue Holofernes.

*Alchior.*

Judith, a greis va c'halon  
 Me a gred e Toue guirion,  
 Me so prest d'en em foumeti  
 Quercouls ha c'hui de adori.

Me gred e Doue Eternel  
 Hac èn ar Mæste universel :  
 Contant oun da veza Christen,  
 Joa bras am-eus ous e Lesen.

*Judith.*

Deomp bremâ var an Ennèmiet,  
 Ma vezo ar victor achevet ;  
 Coufquet int oll bremâ dija,  
 Sounit an drompill d'o dihuna.

Greomp seblant d'o gombati,  
 Evit caout leac'h d'o choqui ;  
 Rac pa velint ar gontel-mâ  
 Leun a c'hoad, e tuint da sponta.

Pa e guelo ar Soudardet,  
 An Arme vezo deroutet ;  
 Ha sounit ar gombat, trompillou,

Ma zaï ar Soudardet d'o festou.

*Ar Santinal.*

Vagao, it prest da ziuna

Ar General, countit deza

E ranquer brema combati

Ous an Arme a Vetuli.

Livirit dezàn dihuna,

Ar Gardou araoc a dosta,

Na zefor nemet e gommandamant

Da gommanç ur gombat sanglant.

*Vagao.*

Va C'holonal, diuner,

Cummanç ar gombat a so prest;

An Ennemièr so deut varnomp,

Hac a ra goab ac'hanomp

Hema eo ar maleur so erruet

En nos-mâ sur, va mignonet:

Hor General so dibenner

Dre he finessa gant Judith.

Collet omp tout, ret è tec'het,

Pa zeo hor C'holonal dibennet:

Tec'homp diouc'h Doue Israël

A ra deomp ur glac'har mortel.

*Ar Pontifet hac ar Veleyen*

*a Vetuli*

Criomp buez hir da Judith,

Buez hor Princes fur ha parfet,

Ha nerz d'he brec'h victorius,

Pe dre hini Doue so glorios.

Canit gloar Jerusalem,  
 D'ar Brinces Judith, bep Christen,  
 E deus lazet un den cruel,  
 E vit dilivra ar bopl a Israël.

Deomp en Ilis tout affamples  
 Da gana Canticou neves,  
 E vit meuli e Majeste,  
 Ha dont da veuli hon Doue

Offromp hor c'halon da Zoue,  
 Hor c'horf, hor speret, hon ene,  
 E vit pa vezo hor buez finisset,  
 Ma hon recevo er joausdet.

**F I N.**